

**Kevredigezh KERLENN STEN KIDNA**  
**Association KERLENN STEN KIDNA**

Mellad 1añ :

Krouet ez eus, etre an dud a-du get an statudoù-mañ, ur gevredigezh hervez lezenn ar 1añ/07/1901 ha dekred ar 16/08/1901 a zo hec'h anv : Kerlenn Sten Kidna

Article 1er :

*Il est créé, entre les adhérents aux présents statuts, une association régie par la loi du 01/07/1901 et le décret du 16/08/1901, ayant pour titre : Kerlenn Sten Kidna (Cercle Sten Kidna)*

Mellad 2:

He fal a zo derc'hel bev ha pinvidikaat ar glad sevenadurel brezhonek e Bro an Alre, ar yezh da gentañ penn.

Article 2:

*Cette association a pour but de maintenir et enrichir le patrimoine culturel breton au Pays d'Auray en particulier la langue.*

Mellad 3 :

E kêr an Alre, 6 ru Joseph Rollo emañ he sez. Diwar diviz eeun ar c'huzul-merañ e c'hello bout cheñchet ar sez.

Article 3 :

*Le siège social est fixé 6, rue Joseph Rollo à Auray. Il pourra être transféré par simple décision du Conseil d'Administration.*

Mellad 4 :

Ar gevredigezh a zo enni :

- Izili oberiant : ezel oberiant e c'hell bout ne vern piv a zo a-du get an statudoù-mañ, paeet e skodenn-vlez getoñ hervez ar briz lakaet get ar c'huzul-merañ hag a zo mennet da sikour get ar gevredigezh da gas he falioù da benn.
- Izili a enor : ezel a enor eo nep piv en deus bet roet an dorn d'ar gevredigezh dre e sikour pe e varregezh. Get ar c'huzul-merañ e vez anvet an izili a enor evit ur prantad didermen. N'eus ket na dreist-gwirioù na redi ebet da heul ar statud-se.
- Bout ezel ag ar gevredigezh a c'hell bout asantet pe nac'het get ar c'huzul-merañ.

Article 4:

*L'association se compose :*

- *membres actifs : peut être membre actif, toute personne adhérent aux présents statuts, acquittant une cotisation annuelle dont le montant est fixé par le Conseil d'Administration, et désireuse d'apporter sa contribution à la réalisation des objectifs de l'association*

- *membres d'honneur : est membre d'honneur toute personne ayant rendu service à l'association. Les membres d'honneur sont désignés par le C.A. pour une durée illimitée. C'est un statut honorifique qui n'accorde ni privilège ni obligation.*

*L'adhésion à l'association peut être soumise à l'acceptation du conseil d'administration.*

#### Mellad 5 :

Diemezelañ a ra an den :

- a ro e zilez
- a zo skarzhet get ar c'huzul ma n'en deus ket paeet e skodenn-vlez pe abalamour d'un dra c'hrevus graet. Goulennet e vo get an den displeg ar pezh en deus graet dirak tud ar burev.

#### Article 5 :

*La qualité de membre se perd par :*

- *la démission*
- *la radiation prononcée par le Conseil pour non paiement de la cotisation annuelle ou pour motif grave. L'intéressé(e) sera invité(e) au préalable à présenter ses explications devant les membres du bureau.*

#### Mellad 6 :

Argantet e vez ar gevredigezh get ar skodennoù, an donezonoù, ar legadennoù, ar yalc'hadoù, ar gounid diwar oberiantizoù, embannadurioù pe abadennoù a-bep seurt.

#### Article 6 :

*Les ressources de l'association comprennent le montant des cotisations, les dons, les legs, les subventions, les recettes d'activités, de publications ou de manifestations diverses.*

#### Mellad 7 :

Meret eo ar gevredigezh get ur c'huzul, ennañ 24 ezel d'ar muiañ, bet dilennet evit ur blezad gant ar emvod-meur.

Ma vez kuitaet ar c'huzul get tud e-pad ar blezad merour e c'hell ar c'huzul degemer izili en o lec'h da c'hortoz. Degemeret e vint da vat gant ar emvod-meur nevez. Galloudoù an izili bet dilennet e-mod-se a echu gant dibenn amzer-merour an izili erlec'hiet.

E-touezh e izili e tibab ar c'huzul-merañ, d'ar bihanañ, ur b-prezidant (ez), ur sekretour(ez), hag un d-trezolour(ez). Ma vez rekiz e c'hell envel un eil-prezidant, un eil-sekretour, pe un eil-trezolour.

Bodet e vez ar c'huzul d'ar bihanañ ur wezh bep daou viz goude bout bet pedet gant ar prezidant pe war c'houlenn ur drederenn ag an izili d'an nebeutañ. Ma n'eus ket un drederenn ag an izili eo didalvoud divizoù ar c'huzul.

Kemeret e vez an divizoù get muiañ niver an dud daet d'an tolpad.

Ar c'huzulier(ez) ne vo ket daet da deir emvod da heul hep bout digarezet a vo disklêriet evel unan hag en deus roet e zilez.

#### Article 7 :

*L'association est administrée par un Conseil de 24 membres au plus, élus pour un an par l'Assemblée Générale.*

*En cas de vacance, le Conseil peut pourvoir provisoirement au remplacement de ses membres. Il est procédé à leur remplacement définitif par la prochaine Assemblée Générale. Les pouvoirs des membres ainsi élus prennent fin à l'époque où devrait normalement expirer le mandat des membres remplacés.*

*Le Conseil d'Administration choisit parmi ses membres au moins un(e) président(e), un(e) secrétaire, un(e) trésorier(e). Si besoin est, il peut également désigner un vice président, un secrétaire adjoint et un trésorier adjoint.*

*Le Conseil se réunit au moins une fois tous les deux mois sur convocation du président ou à la demande d'un tiers au moins de ses membres.*

*La présence d'au moins le tiers du Conseil est nécessaire pour la validation des délibérations. Les décisions sont prises à la majorité des voix des membres présents.*

*Tout membre du Conseil qui n'aura pas assisté à trois réunions consécutives sans prévenir sera considéré comme démissionnaire.*

#### Mellad 8 :

Ur wezh bep blez e vez an emvod-meur boutin d'an deiz lakaet get ar c'huzul-Merañ. Holl izili ar gevredigezh a vez pedet pemzektez en a-raok d'an nebeutañ dre aket ar sekretour. Embannet e vez roll krafoù an deiz war ar pedadennoù. Rentañ a ra kont ar burev a labour ar gevredigezh.

Dilennet e vez ar c'huzul nevez.

Kemeret e vez an divizoù hervez ar muiañ-niver ag an izili a zo àr al lec'h pe dre ur galloud. Gellet a ra an izili reiñ o mouezh d'unan bennak arall ma n'hellant ket bout aze. Neoazh ne c'hell un ezel degemer nemet tri dileuriadur d'ar muiañ.

#### Article 8 :

*L'Assemblée Générale ordinaire se réunit une fois par an à la date fixée par le Conseil d'Administration et comprend tous les membres de l'Association, convoqués au moins quinze jours à l'avance par les soins du secrétaire. L'ordre du jour est indiqué sur les convocations.*

*Le bureau rend compte de la gestion de l'association.*

*Il est procédé au remplacement du Conseil.*

*L'Assemblée Générale statue à la majorité des membres présents ou représentés.*

*La représentation par mandataire est admise. Toutefois, chaque membre ne pourra se voir confier plus de trois mandats ou pouvoirs.*

Mellad 9 :

Galvet e vez an Emvod-Meur dreist-ordinal get ar c'huzul pe diàr c'houlenn un hanter d'ar bihanañ ag izili ar gevredigezh. Bodet e vez ha kemer a ra divizoù hervez ar mellad 8. Kemer a ra divizoù evit cheñch ar statudoù, evit divodañ ar gevredigezh hag àr gement kraf arall a-bouez.

Article 9 :

*L'Assemblée Générale extraordinaire est convoquée par le Conseil ou sur demande de la moitié au moins des membres de l'Association. Elle se réunit et statue selon l'article 8. Elle se prononce sur les modifications des statuts, la dissolution de l'Association et sur toute question d'importance.*

Mellad 10 :

Diazezet eo buhez ar gevredigezh àr an divyezhegezh (brezhoneg/galleg).

Article 10 :

*L'Association fonctionne sur la base du bilinguisme (breton-français)*

Mellad 11 :

E bro an Alre e labour ar gevredigezh dreist-holl met gellet a ra kas oberiantizoù da benn e lec'h arall.

Article 11 :

*L'Association exerce son activité principalement mais non exclusivement au Pays d'Auray.*

Mellad 12 :

Reolennoù diabarzh, da resisaat krafoù nend int ket barzh ar statudoù-mañ pe da glokaat melladoù zo, a c'hello bout savet get ar c'huzul a-dal ma vo asantet get an emvod-meur.

Article 12 :

*Un règlement intérieur, précisant des points non prévus par ces statuts ou complétant certains articles pourra être établi par le Conseil, qui le fera approuver par l'Assemblée Générale*

Kadarnaet d'ar 5 a viz Ebrel 2024, get 28 den é votiñ evit an dra-se, 2 chomet hep dibab, ha den ebet a-enep

*Adopté à 28 pour, 2 abstentions, 0 contre, le 5 avril 2024*